


EMSAV

GENVER 1970

NIV. 37



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 37 - Genver 1970

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

| | |
|--|-------|
| Ar gouerion ha diorreadur ar vro | p. 3 |
| An Emsav hag ar Vro (22) [EMVR-113 - 123] | p. 11 |
| Lizheroù p. 11; Danevelloù obererezh : Devezhioù | |
| Studi Politikel Gwidel, 26-28 Kerzu 1969 p. 20; | |
| Kemennadenn a-berzh S.A.D.E.D. | |
| Notennoù politikel (11), Framm ar riezoù. I.- Riezoù | |
| unstadel. II.- Riezoù kevreadel | p. 23 |

AR GOUERION HA DIORREADUR AR VRO

Istor berr stourm c'hweluniadel ar gouerion e Breizh abaoe dek vloaz.

✓ A-douez holl gendereoù Breizh, an hini urzhietañ, an hini darevañ d'en em sevel ha da stourm, an hini kizidikañ ouzh an tuezioù hag ouzh kudennoù armerzhel ar vro eo a dra sur kendere ar gouerion. Un anadenn nevez eo an emgannusted-se mar keñverier ouzh gouzañvusted al labourerion-douar e Breizh etre an daou vrezel. Ken splann eo ma'z eo deuet gounideion Vreizh, gounideion 29 pergen, da vezañ an "aerbouezer" evit gounideion Frañs hag alies ar skouer a heuliont hag ar marc'h ambilh ma reizhont o c'herzhed dioutañ. E lec'h all ez eo bet studiet ar perag eus an anadenn-se (1), hiziv e pledimp dreist-holl da vrastresañ ar penent hag ar penaoz anezhi.

✕ Pouezus eo anaout an dek bloavezhiañ diwezhañ eus stourm c'hweluniadel ar gouerion vreizhat evit daou abeg : da gentañ, dre m'o deus diskouezet an nerzh ez eo deuet kendere ar c'hounideion da vezañ en hon bro; d'an eil, dre ma'z eo merket an dekvloaziad-se gant un emdroadur eus amkanioù ar stourm c'hweluniadel e-unan : da gentañ micherel-strizh ez eo deuet ar stourm, a-dreuz d'e enkadennoù, da vezañ armerzhel ha tiriadel. Setu perak e teskrivimp daou brantad en e emdroadur, - dikoc'h e vije bet marteze komz eus daou lankad rak, e gwir, ez eus anadet ur furm obererezh nevez hep ma steuzfe da vat an hini gozh evit kelo - : ur prantad kentañ a stourm klasel mui pe vui emdarzhek, ur prantad imbourc'h hag arnodadur - a venn bezañ prientidigezh ur stourm a zoare nevez.

a) Prantad an arc'hadurioù hag ar feulster

E dibenn 1959 eo e krogas ar c'hweluniadoù gounezal brezhon da aozañ displegadegoù e pennañ kêrioù Breizh. E Roazhon, Naoned, Brest, Montroulez en em vode bep tro dek mil, pemzek mil den, a zibune dre

ar straedoù, a c'houlenne dont dirak ar Brefeded hag an Isprefeded da ginnig o arc'hadurioù.

Micherel hepken e felle d'ar stourm-se bezañ : lazioù armerzhel ha kevredigezhel ar gouerion a venne difenn (2). Ouzhpenn-se e-touez arbennoù an enkadenn ne zispartie ket ar re a denne da leviadur fall ar Gouarnament gall diouzh ar re a denne da emdroadur ret an armerzh, eleze da goazhadur ar gennad kentael, hag ur c'hilstourm e oa enta en un doare. A-du-rall ez intende kouerion Vreizh en em gannañ evit mad holl gouerion Frañs. Ne verzent ket er mare-se c'hoazh ez eo disheñvel o saviad diouzh hini ar gouerion c'hall na, kent a-se, n'en meizent ket evel un arvez eus saviad ar gevredigezh vreizhat.

Un diforc'h koulskoude na voent ket pell o tizoleiñ eo, er stourm-adoù koueriadel aozet e par ar riez, ez ae Breizhiz diouzh hentoù kalz taeroc'h eget ar riezidi all. Tra ma kendalc'he ar C'hallaoued da ren displegadegoù peoc'hiek e stage Breizhiz gant ar feulster : stankañ an hentoù, herzel an trenioù, stlepel artichaod hag avaloù-douar e straedoù ar c'hêrioù, devañ mouezharc'hioù, aloubiñ un isprefeti (3).

An emskiant tiriadel o tinodiñ.

Ken abred ha 1961 e voe darvoudoù o verkañ e tinode un emskiant tiriadel dindan emskiant vicherel ar gouerion vreizhat. E Sant-Nazer da skouer en em unane al labourerion-douar hag ar vicherourion war an amkan difenn armerzh hollat ar rannvro. Er mare-se end-eeun e krogas ar c'hweluniadoù gounezel brezhon da gaout o luganoù dezho, o vrudañ ai lakadenn ez eo liammet lazioù an holl labourerion e Breizh hag ivez n'eus diskoulm ebet da gudennoù al labour-douar a ve distag diouzh diskoulmoù hollek armerzh Breizh.

Anatoc'h e teuas ivez d'an holl e oa disheñvel a-grenn o lazioù diouzh al lazioù difennet gant ar c'hweluniadoù gall. Embann a rejont zoken krouidigezh ur c'hweluniad gounezel brezhon o vodañ ar pemp departamant.

Berr e voe hoali an danvez c'hweluniad brezhon-se. Renerion ar FNSEA (4) ne voent ket pell oc'h ober un dro-Vreizh hag o kendrec'hiñ unan-hag-unan renerion ar FDSEA e pep departamant, o tiskouez an arvar

e oa evito emzistrannañ diouzh ar c'hevread gall : an arguzennoù arveret, evel an unvaniezh c'hweluniadel, an unvaniezh riez, an efedusted armerzhel, a reas d'an holl renerion departamantel kilañ ha lezel o mennad (5).

C'hwitadenn an arnod-se a gomprenner aes a-walc'h dre lakaat e kont yaouankted ar stourm c'hweluniadel brezhon : daoust ma kroge ar re brederiantañ da spurmantiñ furmoù nevez ledanoc'h d'o c'hudennoù, e chome an obererezh re vicherel c'hoazh, re zibolitikel, en ur ger re "c'hweluniadek"; an holl ne oant ket darev c'hoazh da zremmañ ouzh ster politikel ar pezh a felle dezho ober. Ur poent all zo da lakaat e kont, ha n'eo ket dibouez : un neuz emrenelour oa gant keal ar c'hweluniad brezhon hag a-walc'h e voe evit lakaat un niver bras da ziskrediñ warnañ; an emskiant tiriadel nevez diwanet a sponte rak an emskiant vroadel a oa en hec'h andon koulskoude.

E-se e kendalc'has e-pad un nebeut bloavezhioù ar stourm klasel hag emdarzhek o wiskañ alies doareoù feuls pe feulsoc'h : displegadegoù o treiñ e labezadegoù hag e kabaduilhoù, taolioù dirgel e pep lec'h war ar maez evel tarvadur al linennoù pellgomz, ha krogadoù digor gant ar C.R.S. e Montroulez, Redon, Kemper, Roazhon. Alies-tre e chome an amkanioù er par micherel rik : ar prizioù houarnhentel, nevid ar yer, ar moc'h, h.a..

b) Prantad imbourc'h hag arnodadur

Tra ma kendalc'he ar fourgas hag an difreterezh micherel da gefluskañ ar c'hedveno breizhat ha gall e stagas c'hweluniadourion 'zo da bleustriñ hentoù nevez ha, kentañ tra, da zigejañ damkaniezh ar stourmadoù difrouezh renet er bloavezhioù a-raok. Dizoleiñ a rejont buan e oa un dachenn ma choment gwan-kenan : hini an armerzhouriezh hollek, hag anaoudegezh kudennoù armerzh Breizh pergen. Levr René PLEVEN, L'Avenir de la Bretagne, embannet e 1961, en doa dihunet e meur a hini ur preder armerzhel, met e-pad bloavezhioù e voe tennet dioutañ dreist-holl abegoù da glemm, arguzennoù arc'hadurel, ha droukrañs ouzh ar galloud-Stad. En tu all d'al luskoù nac'hel-se e felle da

bactred a-raok al labour-douar kavout diskoulmoù d'an enkadenn.

Emglevioù tiriadel.

An emglevioù etremicherel, evit a selle an displegadegoù da nebeutañ, o lakaas war hent ul lakadenn nevez, houmañ : n'en em gann ket ar gouerion evit ar c'hounideion hepken, met evit ma c'hall ar re a guita ar vicher chom e Breizh ha kavout gourc'hwel eno. An durc'hadur-se eo a voe e devoud an darempredoù strizh liammet neuze gant aozadurioù a bep seurt en amgant ar pemp departamant : c'hwelun-
iadoù micherour, CELIB (6), strolladoù politikel evel ar PCF, an SFIO, ar PSU, ar MOB; e dibenn 1963 e voe krouet un aozadur armerzhel-rannvroel, anvet CAB (7).

SEMENF ha CECOR.

E 1963 ivez e teu e goulou un aozadur a stumm nevez a zo e bal pleidiñ gant kenwerzheladur ar c'henderc'hadoù gounezal e kornbroioù Kastell-Paol ha Montroulez, ar SEMENF (8). Poan he deus ar gevredigezh o vevañ da gentañ dre ma'z eo re enk he ziriad-obererezh; astennet e voe hemañ goude un nebeut mizvezhioù ha war un dro e voe kinniget ur raktres-diorren o kembodañ holl c'hennadoù an armerzh. Gant ar SEMENF e teue un dremm fetis war ar c'hoant o doa atebieion c'hwelunioù Leon da ziorren o bro o-unan ha da ren an imbourc'hioù rekis.

Pell amzer e voe an durc'hadur nevez-se evit bezañ komprenet gant an darn vrasañ eus an dud. E 1967 c'hoazh da skouer, e Redon e prezegenne Bernard LAMBERT a-du gant ur c'hinnig da eren stourm ar rannvroioù paour eus ar C'henvarc'had.

A-du-rall ez eus gant ar SEMENF ur gwan bras : stag eo dre ar c'hellidoù ouzh ar galloud-Stad ha ne c'hell boulc'hañ labour ebet hep asant ar Gouarnamant gall. Rankout a ra ivez ober gant dilennidi gefridiel a bep seurt (kannaded, maered, h.a.) o deus prouet abaoe pell o diampartiz da ziorren forzh petra er vro.

Keveleb ar SEMENF evit Kornog Kernev eo ar CECOR (9). Evel ar SEMENF en deus ar CECOR sammet labourioù hag imbourc'hioù a bep seurt; e enklask aroueziusañ eo ar studi en deus renet war grouidig-

prezenta X
ezh ur porzh-tireoul hag ur gemplezh kimiek ha treloc'hel e Douarnenez pe e Brest. Teuliad an enklask zo bet daveet dirak Gouarnamant Paris. Pal ar raktres zo krouiñ ur blein-diorren e stumm ijinerezhioù greantelaus e Kornog Breizh.

An ober c'hweluniadel gounezal e Breizh hiziv.

Ar pennaennoù

Emañ armerzh Breizh war zisleberañ, en arvar da dizhout ur poent dizistro. E devoud an disleberadur-se emañ koazhadur ar boblañs. Mar diskenn feur ar boblañs-labour dindan ur sifr savelek, ne vo ket ar boblañs evit diorren en-dro.

N'eus ket a ziorreadur gounezal distag. Hollel e vez bepred an diorreadur. Dre-se, mad ar gounezerezh brezhon, mad ar gouerion, ken ar re a chom er vicher, ken ar re he c'huitay, eo ma ve krouet e Breizh ijinerezhioù. N'eo ket forzh pere, met ijinerezhioù greantelaus.

E-keñver an diorreadur e tiforc'her an ijinerezhioù hervez ma'z int lusker pe get d'ar greantelaat el lec'h ma vezont ensezet. Da skouer, e dibenn an 18^t kantved, an ijinerezh treloc'hel en deus roet tro d'an ijinerezh gwiadell da ziorren; en 19^t kantved e roas tro d'an houarnhentezh da ziwanañ ha da greskiñ.

Hiziv e lavarer ez eo greantelaus un ijinerezh pa laka ijinerezhioù all da ziorren en-dro dezhañer vro m'emañ. N'eus a ijinerezhioù greantelaus nemet an houarnouriezh, an treloc'herezh, an ijinerezh kimiek, ijinerezhioù ar gremm.

N'eus ket bet betek bremañ e Breizh a ijinerezhioù greantelaus. "Keñveriomp da skouer ar greantioù-dir er Ruhr hag an arsanailhoù e Breizh; e-kichen ar re gentañ ez eus bet savet ur rouedad greantioù-pleuskañ all; arsanailhoù Brest hag An Oriant n'int ket stag ouzh armerzh ar vro ha n'o deus ket lakaet greantioù all da ziwanañ" (10). En hevelep doare, ar greanti Citroen e Roazhon ned eo nemet un drev eus un embregerezh gall : kenempret eo gant ar greantvaoù gall, met diempret e-keñver an armerzh brezhon.

Ar studioù

Ar SEMENF ha dreist-holl ar CECOR o deus fiziet en armerzhourion studiañ kudenn diorreadur Breizh (11). E-maez amboaz ar pennad-mañ eo dezrevellañ an imbours'hioù kalvezel ha kellidel a zo bet kefleuniet. A-walc'h eo degas amañ ar c'hlozadur hollek o deus bet : helvus e ve ensezañ ijinerezhioù greantelaus e Breizh. An ensezadur bastusañ evit an ampoent e ve ur porzh-tireoul e Brest pe e Douarnenez.

An arnodoù-ercounit

Arnodoù e-keñver ar Gouarnamant gall.

Ur wech diazezet-mat ar studiadenñ a-zivout ar porzh-tireoul e Kornog Breizh hag ijinerezh an tireoul e Brest, o deus armerzhourion Kambr al Labour-Douar eus 29 hag ar CECOR graet bruderezh e-touez poblañs an departamant ha skoazellet maer Brest da zifenn ar raktres dirak Gouarnamant Paris (12).

Goude ur prantad a bromesaoù start da Ugentnaviz en deus ar Gouarnamant gall divizet e 1969 krouiñ ar porzh-tireoul nevez e Le Hâvre. N'en deus ket roet respontoù sklaer war abegoù an dibab. Goulakaat a c'haller o deus al levierion c'hall kemeret harp, etre re all, war arguzennoù belloniel : a) ar Gilvac'h Vrezhon (Réduit Breton) : rak-luniet eo tiriad Breizh evel tachenn argil da geñver un aloubadur eus Frañs b) enepbelloniel eo diazezañ ur porzh-tireoul hag ur greantva e-kichen ur porzh-brezel e Brest.

Arnodoù e-keñver an trustoù.

Emañ an arnodoù-se en o ren bremañ. Hep arvar da faziañ e c'haller diouganañ e c'hwitint ivez. N'int nemet un doare da gilañ ar gudenn, rak galloud armerzhel ha galloud politikel zo ereet e Frañs e doare ma touj ar galloud politikel lazioù ar galloud armerzhel, met ivez ma ne sav ket hemañ a-enep d'ar galloud politikel, dreist-holl p'emañ e kont "lazioù uhelañ ar riez".

A-du-rall, daoust ma ve helvus ent dizave ensezañ ijinerezhioù greantelaus e Breizh, ned a ket an ensezadur-se hervez red an tolpadur kevalaour en Europa. Helvusoc'h eo d'ar c'hreantourion diazezañ o embr-gerezhioù el lec'hioù greantelaet endeo. Helvus e ve marteze ar porzh-

tireoul e Kornog Breizh, helvusoc'h e vo avat hep mar ebet e Le Hâvre pa vo nesoc'h da galon armerzhel ar riez.

Klozadurioù.

Eus an damsell-mañ war ar stourm c'hweluniadel gounezal e Breizh e c'haller digejañ un nebeut poentoù :

- Ar c'hendere ar muiañ kizidikaet hiziv e Breizh ouzh kudennoù armerzhel ar vro eo kendere ar gouerion. Ur roll lusker en deus, na gaver gant kendere all ebet.

Ma ne c'haller ket komz eus emskiant politikel brezhon, ez eus gant ar gouerion ur skiant eus ar vro, ur staged ouzh he douar, a zo amplegadoù eus an emskiant politikel brezhon. Fellout a ra dezho chom e Breizh, zoken ma paouezont a labourat an douar.

- Roll lusker ar gouerion a weler fetisaet gant an imboure'hioù armerzhel renet war o atiz. Gouest int bet da dremen en tu all da vevennoù o micher ha da gemer ur preder hollek gant lazioù ar gevredigezh a-bezh. Prest int da dremen e-biou d'ar pennadurezhioù kefridiel, da reiñ o fiziañs d'ar re a ziskouezo bezañ gouest da gas da benn diorreadur ar vro.

Ampolitikelezh ar c'hweluniadoù gounezal, - nad eo nemet un arvez eus ar goulo politikel a ren e Breizh, - he deus e-pad pell o lezet morzet ha dizifenn dirak ar mestronierezh politikel hag armerzhel. E-pad dekvloaziadoù int bet dalc'het dindan gazel-ge gant ar galloud politikel gall hag ar galloud armerzhel kevalaour. Kroget int da anaout o stad a vestroniadur. Un hent hir o deus c'hoazh da ergerzhout evit piaouañ o dieubiezh.

- Ma ne zougont ket ar frouezh a vennent dougen war zouar ar vro, e toug an imboure'hioù armerzhel renet gant kouerion Vreizh frouezhioù pouezusoc'h en o speredoù, e stumm anadurezhioù :

- diorreadus eo Breizh;

- lazioù ar galloud politikel gall ha diorreadur Breizh zo digenrezus;

- durc'hadur ar gevalaouriezh c'hall hag etrevroadel a ya a-enep da ziorreadur Breizh. Ne c'hell ket luskañ an diorren e Breizh an hevelep kevalaouriezh a zo bet luskerez an isdiorreadur brezhon. An tolpadur tiriadel a denn da lakaat diorren an tareadoù diorreet endeo.

(1) Sl. "Breiz Atao" hag an daelerezh-dieubiñ, Emsav 33/263 ha /269 hh. pergen, 1969.

(2) Amkan armerzhel pennañ oa ul leviadur a'r prizioù spletus d'ar gounezerezh. Kinnig a raent ur reizhiad ma ve dalc'het ar prizioù nanngounezel en ur c'heñver reolet gant ar prizioù gounezel. Al luganoù a lenned neuze war ar skritelloù oa eus ar stumm-mañ :

1952 Gwinizh : 3500 F Bara : 45 F

1959 Gwinizh : 3500 F Bara : 67 F.

1947 Ur stlejer = 100 q gwinizh

1959 Ur stlejer = 400 q gwinizh.

Unan eus an araezioù kinniget oa berzañ an enporzhiañ war ar prim.

An amkan kevredigezhel oa ur c'hedskor gounezel kevatal da gedskor ar micherioù all.

(3) D'ar 04 06 61 e voe harzet 13 kouer tamallet dezho bezañ distr-ujet dre an tan mouezharc'hioù e korn-bro Pont'n-Abad. D'an 08 06 61, GOURVENNEC hag e baotred a aloube isprefeti Montroulez.

(4) FNSEA, Kevread Riezel ar C'hweluniadoù Gounezel; FDSEA, Kevread Departamantel ar C'hweluniadoù Gounezel.

(5) Da heul ar c'hwitadenn-se e voe aozet an FRSEAO (Kevread Rannvroel C'hweluniadoù Gounezel Kornog Frañs) a gemere da ziazez ar Rannbarzhioù Steuñvel Pays de Loire ha Bretagne. Levierion 29 a nac'has kemer perzh er FRSEAO dre an abeg ma oa diaesoc'h difenn ur rannvro vraseget unan a vent gant Breizh.

(6) CELIB, Poellgor Studi ha Stourm evit al Lazioù Breizhat.

(7) CAB, Poellgor Ober evit Breizh, savet e dibenn 1963.

(8) SEMENF, Kevredigezh Armerzh Kemmesk ha Studi evit Norz Finistère. Ar c'hevredigezhioù a seurt-mañ zo kevredigezhioù a wir prevez ma c'hell kemer perzh aozadurioù-Stad. Kellidet e vezont gant arc'hant tud prevez kenkoulz ha gant arc'hant ar Stad.

(9) CECOR, Poellgor Emastenn Kornog Kernev, zo ur gevredigezh nervedez dezv 1901, n'emañ ket dindan beli ar Stad.

(10) Sl. An isdiorreadur, Notennoù armerzhel, Emsav 6/150, 153 1967.

(11) Sl. G.de BERNIS ha J.F.TROUSSIER, La Bretagne et le Développement, 1967; J.MIOSSEC ha P.BELLE, L'Impératif Industriel de la Bretagne Occidentale, 1969.

(12) Sl. CABRO, EMVR-5, Emsav 16/116 1968.

A N E M S A V H A G A R V R O (2 2)

LIZHEROU

"A-du gant tost pep tra [EMVR-109], peurgetket peurarallekadur ar yaouankiz e Breizh () hag an didruez m'eo ret dimp bezañ ouzh ar renavied. Un arroud avat a welfen a-walc'h displeget ledanoc'h : "en em zistagañ a-grenn diouzh ar bed kozh" hag "an hiraezh d'an tremened" enebet ouzh al "lusk da grouiñ ur bed nevez". N'eus nemet daou c'her am laka diaes : "a-grenn", ha "hiraezh". Evel just n'eo ket seurt hiraezh a vroud an arzour da grouiñ, hogen derc'hel a ra kont neozh eus an tremened, rak n'eus skouer ebet eus un arzour en dije krouet tra diwar netra. Marteze ez eeunan re ar gudenn o lavarout : an emsaver a zalc'h kont eus an tremened, al ledemsaver en deus hiraezh dezhañ." (16 11 69) EMVR-113

Pa gomzer eus "bed" kozh, nevez, henvoazel, h.a., e ranker meizañ mat ar ger "bed". Ne veneg ket aze an teskad eus kenderc'h-adoù ur gevredigezh en ul lec'h pe en un amzer, eleze ur bed ergorel. Menegiñ a ra ar pezh a chom gant an dud ur wech lamet diouto ar bed ergorel ma vevont, - ur bed dangorel eo enta, ur vedouriezh. Bemdez e kaver tud na glot ket ar bed ergorel ma vevont gant ar bed dangorel o deus danzeet e lec'h all : ar gouerion displantet da skouer, o vevañ evel estrenion e kêr; disklotadur re vras ez eus evit ma teufe o bed dangorel da doniañ gant ar bed arnevez o gromn. Anadenn an displantadur eo, disheñvel diouzh an diwriziennadur (1), daoust ma'z eo alies un azon all eus an hevelep droug.

Aze emañ arbenn an aergelc'h kleñvedel a ren er Mouvement Breton. Hemañ zo, dreist pep tra, repu an displantidi a vourr en o displantadur, ur gwir Ti an Den Mat m'emañ er gêr Krennamzeriz kenkoulz ha poellataerion Siècle des Lumières, ma c'hell Don Kic'hoteion bemnoz goafata milinoù ar bed greantel ha gourvibion brezelidi Fevarzek ober an Dispac'h bolchevik; hep kontañ an displantidi home-made : fosilennoù an Eil ha zoken ar C'hentañ Emsav, karget c'hoazh gant dangorelezh ar PNB pe Doue oar petore ledemsav ankounac'haet, tud oc'h unvaniñ ar skritur, tud luget en enkadenn ar bloavezhioù pemont, ha tud oc'h ijinañ S.A.D.E.D....

Dizañjer eo an dud-se. O dilerc'hegezh istorel a lam diouto pep krap war an darvoudoù, - pa zere ar c'hrap o deus ouzh darvoudoù an tremened. Ken dizañjer int diouto o-unan hag aspadennoù ar bed henvoazel a zo c'hoazh er vro. An danjer eo e kouezhfe an Emsav e trap o disklotadur o welout ennañ, n'eo ket ur c'hleñved, met un doare-bezañ broadel, un arvez dibarek eus ar vrezhonelezh.

Dizañjer eo an dud-se gant ma ve lakaet harzoù fraezh etre an Emsav hag int. E-pad pell avat ne voe ket eus an harzoù-se, hag ar mesk a veze en Emsav pa gemere spesoù henvoazel e-touez e amkanioù, ar mesk hag an digalon dre ma teue hep mank ar c'hwitadur da glozañ pep hini eus e embregadennoù mirelour. E-doug un hanterkantved e voe ar flaer en Emsav gant an tabut faos-mañ : hag e tleer bezañ Brezhon er bed arnevez, pe kreñvlec'hiañ Breizh-Izel ouzh ar bed arnevez divreizhat ? Dibaot e voe pell amzer, zoken e-touez an arnevezourion, ar re a wele spis e oa ar Vreizh-Izel e kaoz ur bed dangorel hep ateb ergorel ebet, ur spes da zibarfreuzañ ar buanañ gwellañ. N'eus nemet kounañ penaos e voe gwasket war VALLEE (2) ha MORDIERN (3) (tamallet e veze da hemañ distrujañ ar brezhoneg pa skrive "melended he blev" e-lec'h "he blev melen"), penaos e voe atahinet Gwalarn (4) ha razailhet ouzh S.A.D.E.D.. Sañset difennerion ar brezhoneg a zifenne e gwirionez o dangorelezh a dud displantet enep ar bed ergorel o moustre a bep tu. Pemont vloaz hag ouzhpenn zo bet ezhomm evit lakaat kement-se a-wel ha dizoleiñ ar wirionez voutin-mañ : an den ne zifenn nemet un dra, e vuhez er bremañ. Kenderc'hadoù an tremened zo kevala ar bremañ pe n'int netra nemet spesoù da skubañ kuit eus an ti. Ha dres, kevala ar bremañ zo tra ar bremañ, gwalc'het diwarnañ merkoù an tremened a zo merkoù ar marv.

Tennañ frouezh eus kenderc'hadoù an tremened zo kontrol-bev an "hiraezh d'an tremened". Ken yac'haus an eil ha ma'z eo klañvus egile. "En em zistagañ a-grenn diouzh ar bed kozh" zo dezrannañ kement dangorelezh diazas a zo c'hoazh e gwrizienn an oberoù, diazas pa glask klotañ gant un ergorelezh aet da get e-lec'h bezañ stegnet da grouiñ ur bed nevez.

(1) Sl. Pelec'h gwriziennañ ?, Emsav 6/129 1967.

(2) Sl. Frañsez VALLEE, Emsav 3/58 1967.

(3) Sl. Meven MORDIERN, Emsav 2/7 1967. Rebechet e voe da VMORDIERN e zispriz ouzh kouerion Vreizh war zigarez ma varne didruez koueriadegezh oberoù brezhonek e amzer. Kreizet e voe an tabut ur mare war an troiennoù-lavar danzeet gant ar gevredigezh koueriadel. Petra ober ganto ? Pe o degemer er bed kêrel ha greantel, - ha neuze, mar chomont heñvel en o furn, e paouezont a vezañ parzhioù eus ar bed koueriadel rakgreantel evit bezañ parzhioù eus ar bed arnevez; pe o mirout a-vloc'h gant ar bed kozh en deus o c'henderc'het, nac'h o zroc'hañ diouzh ar bed ma vezont arveret, - met neuze plediñ ganto evel tra ar gouerion, eus an diavaez, pe c'hoazh marmouzañ an doareoù-bevañ henvoazel, - anavezet hon eus er Mouvement Breton tud a strive, hag int kêriz, da wiskañ doareoù koueriadel pe a sellent evel koueriadel da brederiañ, da zistagañ,

d'en em zerc'hel. An troc'h evit Meven MORDIERN ne oa ket da lakaat etrezañ bourc'hiz gall ha bed koueriadel ar brezhoneg, met etre ar brezhoneg, "ramz trimilbloaziek" tonket da vezañ vevh vras en-dro, hag ar bed koueriadel war e dremenvar a ginnige e gas gantañ d'ar marv.

(4) Sl. Lec'h Gwalarn en Emsav, Emsav 6/137 1970.

E/EMVR-113

"Penaos en em gemeromp evit tuta ? Reizhiad ebet. Evel ma teu e teu. War evezh e chomomp hag e lammomp, shoot the bear. () Ur munud kalvezel : arabat bodañ kalz tud war un dro; etre daou ha pemp, ket muioc'h, a-hend-all ne c'haller ket chom pell war ur gudenn. Ha n'eus ket tu da respont da c'houlennoù an dud ma ne gemerer ket amzer; ur gwilioudiñ gwirion, maieutek kenan a reomp. Kudennoù an dud, evel m'o buhezont, zo pell diouzh an Emsav peurliesañ; met ur meni santadur dispis o deus ez eus ul liamm etre o c'hudennoù hag an Emsav. Labour an emsaver zo neuze patouilhat ganto evit klask ergorelaat al liamm-se. Eurvezhioù a dremenner o fistilhat war draoù dister, met n'eo ket amzer gollet."

(21 11 69)

EMVR-114

"N'eo ket souezh e vefe aet kuit eus E.S.B. tud n'o doa ket komprenet petore roll e oa hini ar framm pe ar gelennadurezh. Hogen un dislavar splann a oa etre ar pezh a embannent hag ar pezh o deus graet e-pad ar bloaz, en Devezhioù Studi hag abaoe. N'eo ket o tarvañ ar framm e oa tu da lakaat an Emsav da vont war-raok, war an dachenn. Ar skarzhide a ziskouez bremañ dre o emzalc'h ez int stag muioc'h ouzh repu ar bloavezhioù pemont eget ouzh an dachenn a felle dezho tizhout, sañset. () Anavezout a rit moarvat istor Job GWENEGAN a oa kelenner e Paris a-raok ar brezel. Un deiz edo an holl oc'h ober ec'hwel hag eñ o labourat. An deiz goude e tiskler emañ bremañ o vont da ober ec'hwel. Taol-et eo bet er-maez. Ar re a fell dezho "derc'hel kont" eus ar framm en em laka er-maez anezhañ. Kar eo o emzalc'h da hini GWENEGAN eleze ken dibolitikel. Hogen ur fazi grevusoc'h c'hoazh eo bet nac'h gwelout ha reizhañ ar fazi kentañ. D'ar mare-se e oa nac'h an dalerzh emsavel eleze nac'h an dezrannañ a rank pep emsaver ren war e oberoù. Hogen ar skarzhide n'o deus ket nac'h hepken respont d'an dezrannañ a zo bet graet eus o emzalc'h, nac'h o deus dreist-holl reizhañ o emzalc'h. () Holl o deus nac'h gant nerzh ma ve dezrannet o emzalc'hioù. ()

"Hogen perak ez eus bet kement a strivoù renet a-enep ar framm abaoe hañv 1968 ? Perak kement a amzer tremenet da glask dispenn ar pep talvoudusañ eus an Emsav ? Perak an imor-se ouzh ar framm hag ar gelennadurezh ? Komzet ez eus bet eus galloud. Ne oa ket dasparzhet ar galloud en E.S.B. ha ne oa tu ebet da gemer perzh. Respontet eo bet d'an arguzenn-se war Emsav [30/163]. Hogen n'emañ ket "kudenn ar galloud" e devoud ar stourm renet a-enep d'ar framm.

Ar gudenn diazez e oa houmañ : hag e tegemer an izili an Emsav evit lec'h o buhez pe get ? hag e tegemeront da Istor evito Istor an Emsav. Anat eo n'en deus ket Y.OLIER degemeret ar frammadur en e vuhez, en enep klasket en deus e pep doare en em wareziñ outañ. Kemeret en deus ar framm evit un archer ha n'eo ket evit ur parzh anezhañ e-unan. R n'en deus ket degemeret ar framm en e vuhez. Krediñ a ra bezañ bet ganet en Emsav evel ma kred tud 'zo bezañ kristenion peogwir int bet desavet en un tiegezh ma oa kristenion eus ar gerent. N'en deus ket komprenet e oa ret da bep emsaver ober un dispac'h ennañ e-unan, dont da vezañ un den nevez. Fell-out a ra dezhañ gwelout aze ur "gwalc'herezh empenn", hogen un tammig dizesk eo war an Emsav hag ar gristeniezh, nad int en o don nemet un dispac'h a zistruj dibaouez an den kozh hag a grou an den nevez evel ma tistruj ar gevredigezh kozh evit sevel ar gevredigezh nevez. Lavaret en deus din ur wech e oa-eñ o vevañ er gevredigezh vrezhon ha ne oa ket ret he c'hrouiñ. Hogen petra eo ar gevredigezh-se ? Hag ez eo stroll an dud o deus bet da welout a dost pe a bell gant an Emsav pe ar re a ra ul labour emsavel (eleze poellek e-keñver an Emsav) ? R n'en deus ket komprenet petra eo ur gevredigezh wirion, eleze ur gevredigezh en Istor.() N'en deus ket asantet d'an Emsav peogwir e tistruj hemañ ar gevredigezh kozh ma emañ e vuhez. ()

"Meur a wech en deus S lavaret ne oa ket tu d'en em gompren : n'eo ket souezhus, evit en em gompren eo ret komz an hevelep yezh ha buhezañ an hevelep Istor. Al ledemsaverion a sav a-du gant ESB 1 ha koulskoude ne dostaont ket, evit kelo, ouzh an Emsav. Penaos kompren se ? Lavar an Emsav a chom hag a chomo bepred teñval d'ar re a dremen en e gichen. An dezrannoù n'o deus pouez ebet e buhez ul ledemsaver. Evel moneiz paper n'eus tu da gaout netra en eskemm anezhañ. Pouez ar gerioù e buhez al ledemsaver zo pouez ar follenn ma'z int skrivet. Setu perak e c'hell estlamiñ ouzh tezennoù an Emsav hag en em ren en doare kontrol. Evit an emsaver, ar gerioù o deus ur pouez bras peogwir e klotont bepred gant e oberoù. Unan eus e zamantoù pouezusañ eo dres klotadur e gomzoù hag e oberoù. Y.OLIER a lavare e Breudoù Gouere e oa "ar gerioù un tu da gemer ar galloud". Prest eo da arverañ ar gerioù n'eus forzh penaos hep anavezout ar ster anezho, evel "Istor", "ledemsav", h.a.. Ar ger na glot gant devoud resis ebet n'eo nemet un touell pe un emdouell. Unan eus degasadennoù S.A.D.E.D. eo bet krouiñ ur bern gerioù a glote gant oberoù resis ha n'eus tu ebet bremañ da zianaout an dra-se evel ma n'eus tu ebet da ziverkañ ar framm pe ar gelennadurezh." (24 11 69) EMVR-115

"Ur barrad spouron am eus bet o welout pegen distuz eo e-keñver politikerezh ha denelezh ar vrogarourion vrezhon. Ar C'hallaoued, ken levierion, ken strolladoù, a c'hell c'hoari ganto evel gant bugale. Ha koulskoude an holl tost da vat zo prest da reiñ o buhez ha da baeañ ker o brogarouriezh. Mantrus. ()

"Goulennataet omp bet gant tud an adkellig a-zivout Al Liamm. Respontet hon eus : emañ skridoù an Emsav kozh o vont da get ha n'eo ket deuet c'hoazh a-fonn skridoù an Emsav nevez : enkadenn ar soutadur zo o ren." (24 11 69) EMVR-116

"Ar gudenn pa zaelomp gant unan bennak zo e lakaat d'en em lec'h-iañ e-keñver an Emsav. Alies e vo ret kejañ meur a wech gantañ evit dont a-benn. An doare da lakaat an dud d'en em lec'h-iañ e-keñver an Emsav zo lakaat anezho da verzout an dislavarou a zo enno pe en o emzalc'hioù. Kemeromp da skouer ar paotr a lavare ne c'hallfe ket Breizh aozañ kirri ken marc'hadmat ha re Renault. Penaos kompren abegadenn ar paotr-se a lavare ivez e kave mat-tre ESB 1 ? Dislavarous eo eus e berzh lavarout ez eo mat ESB 1 ha diouzhtu goude "Breizh dieub ne c'hall ket bevañ". Ar frazenn-mañ zo ul lakadenn n'eus tu ebet d'he frouiñ. T en deus respontet mat o lavarout n'eo ket Frañs a ziorreo armerzh Breizh. Hogen ret eo mont pelloc'h ha dizarbenn al lakadenn "Breizh dieub ne c'hall ket bevañ". Peogwir ne c'hall ket bevañ Breizh dieub, ne dalvez ket ar boan he dieubiñ, eleze ne dalvez ket ar boan kadarnaat en oberoù an asant a ro da ESB 1 gant e gomzoù. Moarvat, ar paotr en deus aon da verzout e c'hall Breizh dieub bevañ mat-tre. Hon roll eo diskouez dezhañ ez eo gallus. En un doare hollekoc'h hon roll zo lemel digantañ pep abeg da ziflipout ha pep koustiañ vat. En ur dremen, ar pezh a gont diwar-benn Renault zo faos : 1) aozet e vez kirri e Breizh hag e vezont gwerzhet mat; 2) e broioù bihan evel Holland pe Sveden ez eus greantioù a ra kirri mat kenan n'o deus poan ebet da gevezañ ouzh Renault." (28 11 69) EMVR-117

"An anistor a vezomp dreist-holl evel ur steuziadur eus an amzer istorek, - alese an holl azonoù hon eus deskrivet an eil re pe ar re all (ledemsaer = klañvour an amzer, L.LEMOINE; an amzer ne dremen ket buan en anistor, M.POULAIN; an distro peurbadel, azon a anistoregezh, h.a.). Ma, an anistor zo ivez merket gant ur strishadur, ur c'hurzhadur eus an egor; ()

- ar boblañs dizariat a ya war unpatromekaat; an diouer a andonioù-krouiñ a zevoud steuziadur an tennderioù kevredadel a zo frouezh boas ar vuhez politikel, relijiel, arzel, h.a., reizh. Diforc'hioù stuzegezh a c'hell kreskiñ (evel a welemp e Breizh etre ar rannyezhaoù, met an diforc'hioù-se ne oant ket frouezh ur seveniñ hag un daelerezh, heuliad un troc'h en darempredoù ne lavaran ket; ne zegasent tennder ebet etre an dud, azon e oant kentoc'h eus un diouer razh a dennder). An unpatromekadur-se a ya war un dro gant un emskiant douaroniezhel eus ar vro : Leonad, Kernevad, Douarnenezad eur, ha meizet eur evel-se, hep an disterañ dave d'an istoregezh, hep an disterañ daelerezh o tiwanañ diouzh an diforc'hioù-se; ar re-mañ ne strafuilhont ket an "unvaniezh vrezhon";

- al ledemsav zo frouezh levezon an Emsav, hogen kenderc'hel a ra da veizañ Breizhiz hervez doareoù un egor anistorek; ne gomzan ket eus ar folklorourion a gendalc'h plaen da gorvoiñ an egor douaroniezhel. Komz a ran eus izili ar strolladoù politikel. Evit U da skouer, bezañ eus U.D.B., eus F.L.B., eus Bretagne-Action zo c'hoazh evel bezañ eus Plougastell pe Landernev, - evel-se emañ an traoù, ret eo doujañ d'an diforc'hioù-se evel ma toujer d'ar c'hoefoù disheñvel. () Setu c'hoazh aze un amoedigezh eus al ledemsav : kas kurzhadur an egor betek ar penn pellañ;

- roll an Emsav zo terriñ dizehan an unvaniezh-se, lakaat etre an dud islonkoù kevala istorek an denelezh. () Evit ar gristenion ez eus da venegiñ amañ un arroud eus an Aviel : n'on ket deuet da zegas ar peoc'h met ar c'hleze; en abeg din e savo ar breur enep d'e vreur, ar mab enep d'e dad, h.a.. Dre sammañ dislavaroù ar vro e sammer, p'en em gemerer mat evel just, dislavaroù an denelezh a-bezh; arabat e ve meizañ an ober merket gant ar verb sammañ amañ evel un ober hiniennel, met evel un ober kevredadel : ur stroll kevredadel o sammañ islonkoù an istoregezh, a zigor etre e izili an islonkoù-se, - etrezo hag en-dro dezho. Ar stroll-se, e Breizh ne c'hell bezañ nemet an Emsav, a zigor an egor istorek er vro. Aes eo kompren arc'hwel an diskarzhañ, - ha marteze ivez ar bam o deus ur bern tud pa ouzont ez embregomp an arc'hwel-se: santout a reont hep henn meizañ fraezh ez eus aze un azon mat, - dimp-ni da zisplegañ dezho un azon eus petra : eus an egorekaat istorek."

(03 12 69)

EMVR-118

"Mar gellit respont din hep re a drabas, lavarit din 'ta e peseurt niverenn eus Emsav ez eo bet spisaet ar c'hemm etre hanvez hag Istor." (11 12 69 - 1)

EMVR-119

E gwir, an enebadur etre arvez istorel hag arvez hanezel n'eo ket nevez er preder europat, nag er preder relijiel. Hebreiz eo ar re gentañ o deus roet ur finvez, eleze ur ster, d'an Istor. Diwar neuze e voe enebet ent pennaennel daou zoare da veizañ an darvoudoù : an doare naturel evel ma reas HERODOTOS hag e heulierion, hag an doare finvezel evel ma rae aozerion ar Bibl. Kempleshoc'h eo an traoù, rak an doare "naturel" ned eo ket ken naturel-se a-benn ar fin : an hanezour a zibab bepred seurtoù 'zo a zardvoudoù, ar re a glot gant tonkad e vro pe ur savboent dibarek all (Hanez Breizh a ro kalz pouez da emgann Ballon; Hanez Frañs n'en meneg ket koulz lavarout, - ar pezh a ziskouez n'eus ket a hanez hep un tuadur istorel). An hanezour ned eo morse un daneveller "fizikel" eus an darvoudoù, setu perak e komzer kentoc'h eus tuadur hanezel ha tuadur istorel.

Ur skouer meneget n'eus ket pell war Emsav 36/364 : lakaat a-wel an hevelepted a zo etre labour VALLEE ha labour an Emsav hiziv zo mont diouzh an tuadur istorel. Deskrivañ an darvoudoù a verkas buhez hag oberoù VALLEE, an darvoudoù a verk buhez an

Emsav a hiziv hep mont pelloc'h zo kemer ur savlec'h hanezel. Evit ar savlec'h istorel emañ ar wirionez en hevelepted etre emsaverezh VALLEE hag emsaverezh hiziv. Evit ar savlec'h hanezel emañ ar wirionez gant dikted an darvoudoù danevellet. Lavaromp diouzhtu n'eus enebadur ebet etre gwirionez istorel ha gwirionez hanezel; er c'hontrol, ne c'hell ket ur wirionez istorel bezañ diazezet war danevelloù gwariet eus an darvoudoù.

HEGEL (1) eo an hini kentañ a zisplegas ar c'hudennoù-se e yezh ar brederouriezh. D'e neul, MARX hag ENGELS a dennas o mad eus meizad finvezel an Istor. Ne raent nemet adkemer ar c'hevala biblek ha kristen. An arver graet ganto ha gant o heulierion avat ne voe ket bepred diouzh ar reizh diazezet gant ar Bibl. Meur a brederour a zezrannas arver soviedel meizad an Istor hag ar wirionez. Ar Gall MERLEAU-PONTY da skouer (2), hag ivez MARCUSE a studi ent hir poellouriezh ha divezouriezh ar renad soviedel (3). E-barzh e levr Soviet Marxism e tiskouez MARCUSE penaos ne gil ket Soviediz rak falsañ an hanez a-ratozh-kaer a-benn kas an Istor war-du e finveziou. An Alaman HEIDEGGER a bledas hir gant ar gudenn hanez/Istor (4). E Breizh ivez e voe kaset studi ha pleustr an daou vezad; embannet ez eus bet pennadoù-studi war Preder (5) hag Emsav (6); a-du-rall, aozerion ar c'hentelioù Istor nevez embannet gant S.A.D.E.D. a zalc'h kont bepred eus an daou savlec'h hanezel hag istorel; ret eo menegiñ ivez an arguzerezh a voe renet e diabarzh E.S.B. en nevez-amzer 1969 ma edo en e greiz meizadoù an Istor hag an hanez (7).

- (1) HEGEL, Die Vernunft in der Geschichte (Ar Poell en Istor) 1822-1828.
- (2) MERLEAU-PONTY, Humanisme et Terreur, Paris 1947; Les aventures de la dialectique, Paris 1955.
- (3) Herbert MARCUSE, Soviet Marxism, New York 1956; el levr e kaver ur pennad war Ar boellelezh nevez, ha gouestlet eo an eil eus div lodenn an oberenn d'An divezouriezh soviedel.
- (4) Sl. da skouer M.HEIDEGGER, was ist das - die Philosophie ? Pfullingen 1956, displegadenn ma kaver enebet fraezh an daou dermen historisch (hanezel) ha geschichtlich (istorel).
- (5) ABANNA, Amplegadoù ur gelennadurezh politikel, Preder 72-73/7. L.LEMOINE, Marv Sokrates, id. /48 1965. G.ETIENNE, Isdiorreadur ha Bredoniezh, Preder 84-85/45 1966.
- (6) An Emsav evel ober hag evel Istor, Emsav 5/105 1967; Notennoù evit kelenn an Istor, Emsav 26/37, Al Liamm 133/108 1969.
- (7) Sl. EMVR-60 - 66, Emsav 28/93 hag Emsav 1969 passim.

"O lenn EMVR-103 (35/344) e lavaran : "Mat, diskaromp ar gevredigezh vrezhon henvoazel - graet eo forzh penaos - met diwallomp a ober fae war doareoù diavaez ar vreizhadelezh. Hep an derc'hvoud, an doareoù-diavaez n'eus anezho nemet traoù kleuz, goullo; ha ne vo ket an derc'hvoud gwall-louet, disasun hep ar fichadurezh ivez ? Me ne'm eus bet morse c'hoant da wiskañ chupenn ha tog va zad, ha ne'm eus ket klasket deskiñ seniñ bombard pe viniou a-zevri. Hep ar gwiskamantoù breizhat ez eo Breizh untonoc'h da welout. Hag ar biniou, ma ne blij ket e sonerezh da Vreizhiz 'zo, a dizh re all en un doare dibar hag o laka da zasseniñ ouzh traoù derc'hvoudel breizhat." (11 12 69 - 2) EMVR-120

Daveiñ a reomp hon c'henskriver d'ar respont graet uheloc'h d'al lizher EMVR-113. Pell diouzhimp ar c'hoant da zistrujañ ar biniou war zouar Breizh. Ne gav ket dimp e ve aze kennebeut mennad aozer al lizher EMVR-103. Pa lavar "salvet eo bet ar biniou" e verk hepken un azon eus an digempoell a zo en amkanioù ar Mouvement Breton.

Anzavomp n'eo ket gwall azas ober, evel ma ra EMVR-103, gant "doareoù diazez" ha "doareoù diavaez" evit dezrannañ ar "vreizhadelezh", ha ne zegas netra muioc'h lakaat an daou geal er stumm "derc'hvoud", "fichadurezh". Henvoazelat binvioù meizer-ezh !

Ar bed henvoazel da zistrujañ eo dilerc'hioù ar bed dangorel henvoazel a zo o hentiñ c'hoazh Breizhiz er bed arnevez, dreist-holl Breizhiz ar Mouvement Breton. Da zistrujañ dreist-holl eo ar gredenn o deus ar re-mañ e tleer stourm da zerc'hel enezennadoù a henvoazelezh er bed arnevez. Hag ar violoñs zo un enezennad a Grennamzer en 20t kantved ? Mar dle padout ar biniou e vo evel parzh eus ar bed arnevez, evel benveg-sonerezh boutin eus ur gevredigezh arnevez, ha n'eo ket evel aspadenn ur bed aet da get.

E/EMVR-120

Respont da E/EMVR-107. - "Ne'm eus ket lennet an arroudad meneget eus levr Y.OLIER : "O sellout war va c'hiz". O lakaat ez eo gwir ar pezh a zanevell an aozer, "e oad kelennet war an hentennoù gwellañ da skignañ tolpadou displegadegerion", ne oa ket a-walc'h a bouez war an dra-se evit ma c'hallfed ober anezhañ un arouez eus doare-gwelout ar Gwazerezh Arbennik. Me a rae kentelioù e kreizennoù Sant-Brieg, Landivizio ha Naoned, ha ne'm eus nep gwech, mar 'm eus soñj mat, pledet d'ar seurt emgav (enebiñ ouzh displegadegerion). Ur c'heneil hag a heulie ar c'hentelioù roet e Kemper a lavar ne voe ket graet kennebeut er greizenn-se. Met e-doug ur sizhunveziad kentelioù gourdonerezh e diskar-amzer 1943 e Roazhon e voe anv hervezañ eus diarbennoù da ober e-keñver displegadoù enebourion. D'e veno ne oa aze nemet un neuz, un tu-skouer eus ar gourdonerezh a vez roet e pep bro d'an nerzhioù a dle gwareziñ ar Stad. Hon c'hefridi a vije stourm, da lavarout eo en em gannañ ivez,

da sevel ar Stad vrezhon, ha goude da wareziñ ar Stad. (Bagadoù-Stourm ar Strollad Broadel a oa, d'ar mare-se, un dra disheñvel : o roll a oa gwareziñ ar Strollad). Berrboell e vije bet chom hep rakwelout degouezhioù ma vije displegadegerion o klask "troc'holiañ" ar Stad Vrezhon, hag anat e oa e vije bet iset ar boblañs da gilstourm a-raok ma vije savet ivez. Ha pa vije bet 2/3 pe 3/4 eus ar boblañs a-du gant sevel ar Stad Vrezhon, daoust hag e vije bet reizh herzel ouzh displegadegerion c'helenus ? Koulskoude, an 1/3 pe ar 1/4 a c'hallje c'hoazh bezañ broudet gant Gallaoued pe treitourion da Vreizh, da aozañ kabaduilhoù, da dennañ war ar vroadelourion, h.a.. Ac'hanta ?

"Astennet eo bet talvoudegezh ar pezh a zanevell Y.OLIER evit kadarnaat un dezenn a zo gwir betek ur poent hepken. Gwir eo moarvat e oa mennet renerion ar Vroadelourion d'ar mare-se, (an darn vrasañ eus ar renerion...) da ziazezañ ur renadur, ur gouarnamant, ur Stad vreizhat dizalc'h, pe damzizalc'h, ent politikel, diouzh ar Stad C'hall. An darn vrasañ eus ar vroadelourion o-unan n'o doa mennoz resis ebet a-zivout an doare da sevel ar Stad, ar plegennoù ma vefe gallet henn ober, an endalc'h a vefe d'ar Stad, an darempredoù a vefe etre rummadoù kevredigezhel ar vroad, diazezoù an armerzh, ar pouez hag an emled da reiñ d'ar brezhoneg. Degemeret e oa ganto e vefe diskoulmet ar c'hudennoù-se pa vefe savet ar Stad. En abeg da se e lavared : na gwenn na ruz...

"Ar Gwazerezh Arbennik a oa levezonet gant an doare-gwelout-se. Ouzhpenn-se e tegemere e renerezh moarvat da reolenn ne dle ket soudarded (= kadourion) emellout eus politikerezh, rak politikerezh a dalvez breutaat, marc'hata, prezegenniñ, kuzhat ha touellañ, - traoù a vez graet fae warno gant brezelourion; pe a c'hell hepken gwanaat ar stourmerion en o dezv... A-walc'h e oa bezañ broadelourion, youlet da stourm evit sevel ar Stad vreizhat ha da argas ar C'hallaoued.

X X "Mard eo ret ma ve breutadegoù etre gourion ha kerrenourion (soudarded hag ofisourion), a-zivout kudennoù kevredigezhel, armerzhel hag all, evit ober brezel dispac'hel, neuze ne oamp ket oc'h en em gemer evit seurt brezel. Met hon c'helennerezh ha gourdonerezh a-bezh a amplege e vefemp o stourm e-touez an dud, war ar maez hag er c'hêrioù, - dres evel ma reas paotred ar Résistance. Hon argadoù graet, en em guzhfemp e tiez mignoned, h.a.. Gant kementse e oa goulakaet e oa un darn vat da vihanañ eus ar boblañs a-du ganeomp."

"Un dra da reizhañ c'hoazh : ar Bezen Perrot a voe krouet war-dro an 25 a viz Du 1943, da lavarout eo a-raok drouklazhidigezh an Aotrou Perrot." (11 12 69 - 3) EMVR-121

Trugarez d'hon c'henskriver evit an diell brizius ez eo e lizher. Spisaat a ra e meur a geñver hon anaoudegezh eus obererezh al luskadoù breizhek e-pad an eil Brezel-Bed. Kadarnaat a ra ivez hon dezrannadurioù war ar stourm renet er mare-se. Kelennus eo keñveriañ war un nebeut krefen, ar re end-eeun

meneget gant hon c'henskriver, kelennadurezh ar Gwazerezh Arbennik ha kelennadurezh an Emsav hiziv.

Kelennadurezh ar Gwazerezh
Arbennik :

Ar sevel Stad sellet evel ercounezadur youl ur stroll renerion

ha fiziet e soudarded dibolitikaet o stourm ouzh ar C'hallaoued e-touez ur boblañs dibolitikaet oc'h anzav bezañ gall.

Pedet eo ar boblañs da zont tre en ur stern stadel danzeet er-maez anezhi, dindan renerion n'he deus ket dibabet hag ambrouget gant soudarded na anavezont nemet yezh ar sentidigezh.

Ar goullo amkanel a ren el "lu-dieubiñ", eus an derou d'an dibenn, a-fet aozidigezh da-zont an armerzh, ar c'hev-ala, frammadur ar Stad, furm ar renad politikel.

Prest eo al "lu-dieubiñ" da vrezeliñ ouzh ar boblañs mar nac'h plegañ d'ar Stad "dieub".

An disfiz ouzh ar politikerezh, ar fiziañs en nerzh fizikel hag er sentidigezh zo azonoù a-walc'h eus dihentadur an Eil Emsav politikel, eus e sankadur er "c'halficherezh kadouriezhel" hag e gontammadur gant ar flaeriañs faskour a rene neuze war Europa.

Kelennadurezh an Emsav
hiziv :

Ar sevel Stad sellet evel disoc'h an hent graet gant ar bobl eus stad ur yoc'h arall-ekaet da stad ur gevredigezh politikel.

Ar Stad diazezet gant ar bobl emsavet en ul lu-dieubiñ.

Kefridi an Emsav zo politikaat ar bobl e-ser un daelerezh araokaus :

1) Kentañ kammed an Emsav zo dezrevellañ reizh kudennoù ar vro.

2) Kentañ kammed ar bobl zo anaout reizhded an dezrevellañ ha kas an diskoulmañ war-raok.

3) Hogen dre gas an diskoulmañ war-raok e teu ar bobl da vezañ Emsav : politikaat a ra, emouiziekaat a ra, diarallekaat a ra; diouti e tigej organoù he buhez nevez, ha da gentañ ul lu-dieubiñ.

Seurt daelerezh araokaus a ro kammed ha kammed o furmoù-diazez d'ar gevredigezh, d'an armerzh, d'ar renad politikel brezhon.

Ul labour diaes ha gorrek eo adluskañ politikadur ur bobl risklet en anistor. Met hepken ur bobl politikaet, eleze emouiziek, perc'henn war he c'hev-alaou, kizidik ouzh he gwirioù, a c'hell chom e-maez krap an aotrouniegezhioù.

E/EMVR-121

DANEVELLOU OBEREREZH

Devezhioù Studi Politikel - Gwidel, 26-28 Kerzu 1969.

Gouestlet e voe Devezhioù Studi Gwidel 1969 da gas war-raok stummadur an danvez emsaverion. E brezhoneg e voe renet labour ar beure (kentelioù war ar yezh, dalc'hioù da brientiñ labour an endervezh), e galleg labour an endervezh hag an abardaez.

Gwener 26 12 69

14.00-19.00 ha 21.00-22.30 - Kendael: Ur C'hweluniad Brezhon ?

Rannet e voe al labour e tri dalc'h: 1) Taoliad digor hollek
2) Bodaoù-studi 3) Danevelloù ar bodaoù-studi ha breutaour-klozañ.

A bell'zo emañ mennez ur c'hweluniad brezhon o redek. Hiziv c'hoazh ez embann luskadoù 'zo o mennad da sevel ur c'hweluniad pesketaerion, ur c'hweluniad kouerion, h.a..

Savlec'hiadur hollek eus ar gudenn: en ur prantad eus an emgann-dieubiñ e rank c'hweluniadoù broadel kemer lec'h c'hweluniadoù ar framm sujer. Seurt erlec'hiadur a empleg avat ez eus un darn vras eus ar boblañs o kemer perzh en emgann-dieubiñ. Ar c'hweluniad broadel neuze, ouzhpenn e roll micherel, a c'hoari ur roll-harpañ en emgann-dieubiñ. En Aljeria e voe krouet an U.G.F.A. ouzhpenn bloaz goude derou ar brezel-dieubiñ.

Ha darev eo ar saviad e Breizh evit krouidigezh c'hweluniadoù broadel brezhon ? Nann. Ul lodenn vihan-tre eus ar boblañs a gemer perzh el labour-dieubiñ; braz ar boblañs a chom c'hoazh diengouestlet. Ur c'hweluniad "brezhon" a ve neuze dre ret pe e-maez ar framm gall ha, dre-se, kondaonet da chom pell e stumm tasmantel ur gronnadig, pe e-barzh ar framm gall ma c'hoarife roll ur c'hevezer dister ouzh ar c'hweluniadoù gall er par micherel (dister, pa rafe diouer d'al labourerion vrezhon an abegoù politikel evit mont e-barzh); ouzhpenn-se e enframmadur er reizhiad c'hall a dennfe digantañ pep gwerc'h dispac'hel eeun.

22.30-23.30 - Displegadenn: Istor beir stourm c'hweluniadel ar gouerion e Breizh abaoe dek vloaz. St. Emsav 3773.

23.30-24.00 - Klozaour hollek.

Fazi al luskadoù breizhek a glask sevel bremañ c'hweluniadoù "broadel" ze enta ur fazi damkanel, ur fazi embregel eo ivez: klask a reont broudañ al labourerion d'en em unaniñ dindan ur skritell vrezhon dre werediñ warno a ziavaez o micher.

An Emsav ne c'hell er mare-mañ nemet kejañ ouzh an dud a hiniennoù. Pa vo pesketaerion, kouerion, micherion stummet evel dispac'herion e vint e tro da luskañ an argerzh dispac'hel en o micher.

Sadorn 27 12 69

09.00-11.00 - Kentelioù brezhoneg azzet e daou rummad.

09.30-11.00 - Emvod an Izili evit dezrannañ labour an dero'hent ha brientiñ labour an devezh.

11.00-12.00 - Displegadenn: Petra eo dont d'an Emsav ?

An Emsav zo an doare da stignañ reizh kudennoù ar vro. An den a zesk stignañ reizh kudennoù ar vro zo o tont d'an Emsav.

Stignet reizh eo ur gudenn a) pa na chom dislavar ebet er pezh a lavar an dezreveller b) pa ziskouez fraezh an dezreveller an holl zislavaroù a zo er saviad dezrevellet.

Savlec'hiadur ar meizadoù : Emsav, framm, strolladoù politikel; galloud, kevredigezh, politikadur. Ar galloud zo galloud ur gevredigezh. Ar galloud brezhon zo galloud ar gevredigezh vrezhon. Pal an Emsav n'eo ket kemer ul lod eus ar galloud gall, - ned eo ket enta ur strollad politikel, - met krouiñ ur gevredigezh vrezhon hag ur galloud politikel brezhon.

13.30-15.00 - Kentel war ar yezh resis politikel.

15.30-19.30 - Kuzuliadeg war an darempredoù gant al luskadoù breizhek. Danevell war bodadegoù an FLB 2. Danevell war 8^t Kendaalc'h U.D.B.. Stad an imboure'hioù damkanel a-zivout broadelouriezh ha sokialouriezh. Kudennoù an ober emsavel e kelenndioù an eil derez.

Sul 28 12 69

09.00-11.00 - Kentelioù brezhoneg.

09.30-11.00 - Dezrann labour an dere'hent. Penaos lakaat an danvez emsaverion da bleustriñ war o c'hudennoù. Kudenn an egor kedvuhezel : hervez al lec'h m'emeur, prevez pe foran, perc'hennet pe diberc'henn, e kemm natur an darempredoù. Kudenn ar gerioù gallek arveret el labour bruderezh : troidigezhioù damresis ha leun a drapoù int bepred.

11.00-12.00 - Displegadenn : Istor an Emsav.

Pep emsaver a ren an dispac'h bemdez en e vetou. Ar gudenn vrezhon zo krouet gant an Emsav. Emsaverion hiziv a arver labour emsaverion dec'h. An daou arvez eus pep dispac'h : treuzfurmadur ar vro, araokadur an denelezh a-bezh. Unan eus an araokadurioù degaset gant an dispac'h brezhon zo e-keñver savlec'hiadur damkanel an devoud broadel.

14.00-18.30 - Divizadeg digorsteuñv : ar c'hudennoù a chom; ar goulennoù manet direspont; dezrannadur an Devezhioù Studi Politikel.

E tri dalc'h e voe rannet an divizadeg : 1) Taoliad digor-divr-azañ 2) Bodadoù-studi 3) Danevelloù ha breutadur-klozañ.

Danzezioù pleustret : penaos embreger ESB 1; penaos plediñ gant ar goulennoù a-zivout an armerzh, ar gevredigezh; kudennoù an arc'hant e Breizh; an emsavioù dispac'hel, ar gwariadurioù, an diskarzhioù; darempredoù fetis ha dibarek etre Emsav ha ledemsav; penaos lakaat labour an Devezhioù Studi da dalvezout en emvodoù-kelaouiñ hag en emvodoù-adkelligoù.

EMVR-122

KEMENNADENN A-BERZH S.A.D.E.D.

Emvod hollek S.A.D.E.D.. - Kentañ emvod hollek 1970 ar Strollad a vo dalc'h et e Roazhon d'ar 1st a viz c'hwevrer.

EMVR-123

NOTENNOU POLITIKEL (1 1)

FRAMM AR RIEZOU

I. - RIEZOU UNSTADEL. II. - RIEZOU KEVREADEL

Ensavadurioù-kevanstrollañ, -kevelstrollañ.

Meur a wech c'hoazh hon eus bet tro da ziforc'hañ Stad ha riez. Termenet hon eus ar Stad evel ur gevredigezh politikel emren a-walc'h evit piaouañ ar galloud-bonreizhañ, eleze ar frankiz da aozañ he buhez politikel evel ma kav mat. Ha diskouezet hon eus ar riez evel un dudel-^{evel Saman evel}ezh riek er par etrevroadel, eleze evel bro emveliek. E degouezhioù 'zo e kenglot Stad ha riez hag e komzer eus riez unstadel. E degouezhioù all ez eus meur a Stad er riez, hag anv a reer eus riez kevreadel. E degouezhioù all erfin, e kaver riezoù unanet kenetrezo oc'h ober ar pezh a anver ur gengreriad riezoù.

Stad, riez, kevread, kengreriad zo enta ensavadurioù o strollañ e doareoù diseurt an unvezioù politikel a ya d'ober kevredigezh ar bed. Daou zoare pennañ a ziforc'her d'ar strollañ-se.

Un doare a c'hoarvez eus kendeuziñ unvezioù d'ober un unvez nevez, - an doare eo ma voe graet Frañs da skouer : ar c'hevanstrollañ eo. Un doare strollañ all a zisoc'h gant kenstagañ an unvezioù hep ^{audrey} o distrujañ : ar c'hevelstrollañ eo. E-se e lavarer ez argerzh ar riez unstadel dre gevanstrollañ, ar gengreriad riezoù dre gevelstrollañ, ar riez kevreadel ~~dre gevanstrollañ~~ ha kevelstrollañ war un dro. ^{Roger Leger}

Er pennad kentañ-mañ e studiimp ar riez unstadel hag e teraouimp deskrivañ ar riez kevreadel.

I. - AR RIEZ UNSTADEL

Riez unstadel ha Stad unelour.

Merk ar riez unstadel eo an unelouriezh a ren enni. Lakaat da genglotañ ha derc'hel kenglot bevennoù ar Stad ha ^{gantrioù} bevennoù ar riez a ampleg strivoù dizehan ha kantvedel da unelaat ha da greizennañ.

War veur a dachenn e vez embreget an unelaat hag ar c'hreizennañ-se :

- e par framm ar Stad : kement ezhomm politikel nevez a vez bastet dezhañ dre un organ e dalc'h al levieriezh-kreiz unel;

- e par ar gevredigezh politikel : dalc'het e vez an hevelep keñver dezvel etre ar Stad ha pep hini eus ar geodedourion, hep lakaat e kont nep dibaregezh hiniennel, - ar pezh a veneger dre an termen : ungen-
ezhded ar veli;

- e par an diriegezh : heñveldra, ne vez dalc'het kont ebet eus an dibaregezhioù lec'hel, hag ungenezh eo ivez ar c'heñver etre pep unvez tiriadel hag ar Stad.

Stad unelour ha renadoù unveliek ha hollveliek

Ar Stad unelour ne empleg ket dre ret ur renad unveliek pe hollveliek.

An unveliegezh a verk tolpadur ar galloudoù etre daouarn un den pe un nebeut tud. Kenrezus eo avat ar Stad unelour gant rannadur ar galloudoù hag un dasparzh gwerinek eus arc'hwelioù al levieriezh.

An hollveliegezh a nac'h anaout hag a zistaol pep pal er-maez eus palioù ar Stad. Dre-se, ar Stad unelour ned eo ket dre ret hollveliek.

Koulskoude e ranker lavarout e tisoc'h bepred unveliegezh ha hollveliegezh gant an unelouriezh stadel.

Ar Stad unelour hag ar c'hempouez kreizennañ-digreizennañ.

Dre emberzh e tenn pep framm da unelaat ha da greizennañ. Sevel a ra avat a-berzh an dud framm et nerzhoù oc'h enebañ ouzh an tuadurioù-se. Hervez an doare ma kenaoz al luskoù-unelaat ha -lieselaat, -kreizennañ ha -digreizennañ, e kav ar framm e pep mare kempouezioù disheñvel.

Al lusk d'an unelaat : ar c'hreizennañArgerzh ar c'hreizennadur politikel.

Meur a azon a verk tuadur ar framm stadel da greizennañ. An hini splannañ eo saveladur ur gêrbenn, kreizenn-hoalañ o werediñ war ar vro hervez tri c'hammed : kenurzhiañ kreizennoù all ar vro, o isurzhiañ dezhi, kemer o lec'h. Sklaerius eo Istor Frañs er c'heñver-se. Gwelout a reer ur galloud-kreiz o sujañ tamm-ha-tamm ar c'hreizennoù galloud politikel er proviñsoù, ouzh o distrujañ evit kemer o lec'h, oc'h emellout don-ouzh-don e buhez ar c'humuniezhoù lec'hel. Ken ma kemer ar gwirioniour gall M.HAURICU : "Sol ar Stad ned eo ket ar c'hevrateañ, met ar c'hreizennañ".

X Pal ar Stad unelour zo kreizennañ en he ser ar galloud-dezvañ, ar galloud-barn, ar galloudoù diplomatel, milourel, armerzhel ha gwiraourel.

Ar c'hreizennadur amaezhel.

X Kreñvaet eo uneladur politikel ar Stad gant hec'h uneladur amaezhel, - hemañ diwezhañ eo a veneger er yezh voutin pa gomzer a greizennadur. E-lec'h ur strewad a amaezhierzhioù lec'hel diseurt ha digenurzh e tiazeg ar Stad unelour un amaezhierzh unelaet, urzhasaet ha kreizennet, ar greizenn o vezañ sujet d'al levierzh-Stad. Tri heuliad pennañ zo d'ar c'hreizennadur amaezhel :

- tolpet e vez ar galloud evel nerzh foran, evel barregezh kalvezel, evel galloud-divizout hag -envel;
- dasparzhèt e vez erounezerion ar veli hervez un urzhaz strizh;
- deverket e vez da bep renk ur galloud a-berzh urzhaz war ar renk dindan.

X Tennañ a ra ar Stad unelour dre he nerzhadur diabarzh da gemer neuz ur biramidenn. Er gern emañ ar Gêrbenn, enni piaouerion ar galloud politikel, an urzhioù o tiskenn diouti betek an diaz, eleze betek ar c'hêriadennoù pellañ, dre ur reizhiad a organoù-treuzkas savelet hag anvet ha renet ganti.

Ar Stad unelour a nac'h anaout ur bezoud politikel da gement

devoud na c'houzañv ket an uneladur hag ar c'hreizennadur.

Unelouriezh politikel ha naturelouriezh

A-enep d'an unelouriezh politikel e sav an naturelouriezh. Hervez al luskad-mañ he dije ar Stad c'hall, en ur freuzañ ar proviñsoù, distrujet un "urzh naturel", diverket pep diforc'h naturel etre ar "broioù" hag etre an dud evit lakaat rannoù hag isrannoù he beli e-lec'h ar rannoù naturel kent.

Anat eo e oa pell diouzh ar meizadur hon eus hiziv eus an ensavadurioù-strollañ ar meizadurioù a renas betek an 18^t kantved. Evel m'hon eus gwelet diagent (Emsav 36/374), an diforc'h pennañ eo hep mar en deus ar preder politikel arnevez erlec'hiet an damant d'ar boellelezh ouzh ar fealded d'an henvoaz. A-bouez eo merkañ avat ne oa ket "natureloc'h" ar proviñsoù freuzet gant an Dispac'h gall eget an departamantoù a gemeras o lec'h. Frouezhioù e oant d'an hevelep morloc'h istorel hag ar re-mañ, - war-bouez un dra, an elfenn amevez a voe e diwanidigezh an departamantoù, ar steuñverezh. Mar fell dimp ober breud d'ar Stad unelour, e c'hellomp henn ober en anv an Istor, ar bolitikouriezh pe an divezouriezh, met a dra sur n'eo ket en anv an Natur.

Al lusk d'al lieselaat : an digreizennañ

Nerzhoù-enebiñ a c'hoari bepred enep d'ar c'hreizennadur. Seul greñvoc'h e teuont da vezañ ma tosta ar Stad d'ar peurgreizennadur. Ouzh al lusk da unelaat e stourm al lusk da lieselaat. Un arbenn resis zo en hon amzer evit an holl riezioù kreizennet da skañvaat kefridioù al levieriezh-kreiz ha da zigreizennañ : kemplezhded ar vuhez stadel eo pa laka an organoù-kreiz en arvar da vezañ mouget dindan samm an emelloù berniet. Studiañ a raimp amañ an daou zerez eus al lieseladur kenrezus gant unelezh ar Stad : an digreizennadur amaezhel, an digreizennadur politikel.

An digreizennadur amaezhel.

An digreizennadur amaezhel pe kefridiadel zo an argerzh kentañ o tont da strafuilhañ eeunded voull ar Stad uhelour. Ar wirionourion c'hall, hag int hepken - moarvat pa'z eo en o bro e voe kaset ar c'hreizennañ d'e bar uhelañ -, a laka daou isderez en digreizennadur amaezhel : digreizennadur ar c'hembelioù, digreizennadur an organoù.

X
Digreizennadur ar c'hembelioù, pe digreizennadur dre an urzhaz, pe c'hoazh didolpadur (déconcentration), ne gemm netra e framm organel ar Stad : chom a ra kreizennet an holl organoù amaezhel hag unelaet furm o arc'hwelerezh; anvet e vez bepred ar gefridiaded lec'hel gant al levierezh-kreiz, met hemañ a lez ganto kembelioù bras pe vrasoc'h : ur galloud-divizout amaezhel brasoc'h o deus.

Autelle
collektiv
travailleur
Autelle
Digreizennadur an organoù, pe digreizennadur dre ar gouleviañ, pe c'hoazh digreizennadur ent strizh (décentralisation), a laka e pennkont, er par kefridiadel hepken, galloud andoniek ar strollelezhioù lec'hel. Krouet e vez kreizennoù-divizout trobarzhel ne vezont ket anvet holl gant al levierezh-kreiz met, evit un darn, gant ar stroll-elezhioù lec'hel. Ar c'horfoù-se, dizalc'h pe damzizalc'h, zo neozh o organoù hag o greadoù dindan reolerezh ar galloud-kreiz, - ar reolerezh-se o vezañ anvet gouleviadur.

An digreizennadur amaezhel a denn digant ar Stad unelour hec'h eeunded ventoniell. Hag eñ frouezh an tuadur da lieselaat, ne zisoc'h ket evelkent gant ur Stad lieselour. Ober a ra eus ar Stad unelour eeun ur Stad unelour kemplezh.

Siomi
 An diforc'hioù etre unelouriezh ha lieselouriezh, eleze etre ar Stad unelour kemplezh ha reizhiad stadel ar riez kevreadel a c'haller dezrevellañ dre verkañ ar pezh a vank d'ar rannbarzhioù o tisoc'hañ eus an digreizennadur amaezhel evit bezañ Stadoù kevreet; n'o deus
 - na Gouarnamant dezho, - met hepken pennadurezhioù o piaouañ ur gembeli amaezhel;

- na bonreizh na dezvoù dezho, - met hepken reolennoù dibarek, disentezioù-arverañ, ha n'eo ket diferadennoù-dezvañ-diazez;

- na barnerezh dezho, - ar Reizh o chom kreizennet.

E par an amaezhierzh rik e chom enta bepred an digreizennadur amaezhel, ha pell emañ diouzh an emrenerezh politikel.

An digreizennadur politikel.

Dindan an anvad-se e renker furmoù liesseurt, reoù 'zo fetisaet er frammoù politikel, reoù all o chom e par ar mennadoù. Amañ eo e

kaver furmoù-tremen etre ar reizhiad stadel unelour hag ar reizhiad stadel lieselour. Ar rannbarzhioù amparet neuze zo dezho mui pe vui eus azonoù ar Stadoù-ezel en ur riez kevreadel.

Er broioù m'emañ ensavet ez eo merket an digreizennadur politikel gant ar vezañs e-ser ar rannvroioù eus bodadennoù-dezvañ, eus ur galloud-erounit emren, eus maodiernezhoù 'zo. Ar pezh a vank dezho evit bezañ Stadoù eo ar galloud-bonreizhañ hag ur benvegadur levier-ezhel klok.

Ar rannvroeladur

An digreizennadur politikel a anver a-wechoù rannvroeladur. An termen-mañ zo dezhañ sterioù liesseurt ha bevennet dispis. Dre e gendeverad "rannvroelouriezh" ez eus deuet warnañ un arliv trivliadel. Ar skritell rannvroelour a guzh luskadoù diseurt, armerzhel, stuzegezhel, kravezel, folklorrel, tuet holl da gilstourm en anv ur vedouriezh henvoazel ouzh ar vedouriezh arnevez. Alese klouarded ar rannvroelourion ouzh ar Stadoù o ren, ha pa vent kevreadel, hag ar garantez ouzh ar "vammvro vihan" ma koachont o hunvreoù a emrenerezh. Re estren e chomont da boellelezhioù fetis ar bed arnevez evit krediñ reiñ korf politikel d'o mousgoanagoù disrannour na samañ atebegezhioù an emgann dispac'hel ampleget gant o sevenidigezh.

E-se, an termen rannvroeladur, daoust ma ne verk e-keñver gwironiezh netra muioc'h eget digreizennadur, zo dezhañ dassonioù forc'hellek kenan. Arveret e vez gant ar Gouarnamantoù a-benn herzel ouzh politikadur an danvez disrannouriezh a zo e go e poblañsoù 'zo.

Digreizennadur politikel da heul destagadur pe dizestagadur

Da venegiñ ez eus ivez furmoù 'zo a zigreizennadur politikel o tisoc'hañ eus un aloubadur pe un adkevanadur.

Kembre, Skos hag Iwerzhon o deus miret goude o stagidigezh ouzh Saoz darn eus o dezvoù goubarzhel. Mar o deus miret an dezvoù-se douget a-raok o aloubidigezh, n'o deus evelkent galloud-dezvañ ebet a rofe dezho an tu da embann dezvoù nevez, na levieriezh politikel ebet, - Suiwerzhon hepken he deus adkavet he gwirioù politikel kent o tont da vezañ ur riez en 20^t kantved. Evit Norziwerzhon, Kembre ha Skos ez eo o dezvoù broadel ur glad eus an tremened, - ne c'hellont nag e greskiñ nag e gorvoiñ evel kevala istorek.

An tri departamant gall, Moselle, Bas-Rhin, Haut-Rhin, destaget gant an Impalaeriezh alaman e 1871 ha dizestaget e 1919 o deus miret ivez o gwir lec'hel. N'o deus avat galloud-dezvañ ebet ha ne lakaont ket en arvar unelouriezh ar Stad c'hall.

II. - AR RIEZ KEVREADEL

Mar kaser betek penn argerzh an digreizennadur politikel e reer eus pep rannvro ur Stad emren. Paouez a ra ar riez neuze a vezañ un-stadel evit bezañ liesstadel, ar Stad unelour a steuz o lezel al lec'h gant ur reizhiad stadel lieselour a anver reizhiad kevreadel.

Anadenn ar c'hevreañ.

Al lieselaat a empleg rannañ ha dispartiañ ar rannoù; ur perzh nac'hel eo enta e-skoaz ar perzh yael ez eo an unelaat. Perzh yael al lieselouriezh eo ar c'hevreañ, eleze savelañ liammoù etre ar parzhioù rannet.

Gwelout a reer diouzhtu unan eus diforc'hioù furmel-diazez etre an unstadelezh hag ar gevreadelezh. Kempouez ar riez unstadel zo e dalc'h daou lusk gourzhenebus kreizennañ-digreizennañ, unan hepken eus an daou o tougen an tuadur unelour, ar pezh a laka ar Stad en arvar pa rank heuliañ egile, - alese sonded frammel ar Stad unelour hag an nebeut a frankiz he deus da zaskennañ he frammadur. An uneladur, ouzhpenn-se, zo ur par ma tenn dezhañ hep nepred e ziraez; rankout a ra dibaouez stourm da unelaat ha da chom kreizennet; renet e vez ar stourm-se enep d'an nerzhoù-lieselaat a sav er gevredigezh, ken ma vez alies gourzhenebus lazioù ar Stad ha lazioù an dud hec'h ampar.

Er c'hontrol, kempouez ar riez kevreadel zo e dalc'h an daou lusk kenglokaus rannañ-liammañ, - alese gwevned vras he frammoù, he stabiled ha diseurtiezh ar furmoù a c'hell gwiskañ evel ma welimp.

Div bennaenn a zigejer eus studi anadenn ar c'hevreañ : pennaenn an emren, pennaenn ar perzhiañ.

Pennaenn an emren : ar strollelezhioù-ezel kevreet d'ober ar riez zo dezho goubrientoù ar Stad, eleze galloudoù-dezvañ, -erounit, ha -barn.

Pennaenn ar perzhiañ : ar strollelezhioù-ezel kevreet a gemer perzh dre o derc'houezourion en amparadur hag en arc'hwel an organoù-kevreañ. Kenurzhiadur ha n'eo ket isurzhiadur zo etre an organoù kevreet hag

an organoù-kevreañ.

Termenadur ar riez kevreadel.

E par an ensavadurioù e tisoc'h ar c'hevreañ gant daou seurt aozadurioù ha gwikefreoù hervez ma'z int amparet dre gevanstrollañ, eleze unelaet hag o talvoud evi' ar riez a-bezh, pe dre gevelstrollañ, eleze lieselaet hag o talvoud pep hini evit ur parzh anezhi nemetken.

Kemplezh eo ar reizhiad stadel en ur riez kevreadel : ouzhpenn ar Stadoù kevreet, a zo unvezioù tiriadel, poblañsel ha levierzhel, ez eus un ensav-kreiz engwisket dezhañ ar gembeli riez war an dachenn etrevroadel ha kembelioù diabarzh kenweet gant re ar Stadoù kevreet. Envel a reer an ensav-kreiz-se ar Stad kevreadel; astennet eo d'an diriegezh a-bezh ha da boblañs a-bezh ar riez. Disoc'h eo ar Stad kevreadel d'un argerzh-kevanstrollañ, tra ma'z eo teskad ar Stadoù kevreet disoc'h un argerzh-kevelstrollañ.

En enep d'ar riezoù unstadel ma chom unel ar Stad forzh pegen digreizennet e ve, ez eo ar riez kevreadel un unanad Stadoù a wir bonreizhel. An unanad-se hor bo tro pelloc'h da enebiñ ouzh an unanad a wir etrevroadel ez eo ar gengreniad riezoù.

Termenet e vez ar riez kevreadel evel an hini ma kaver lies Bonreizh e talvoud war un dro pe, e yezh ar gwir, lies aozidigezh vonreizhel. E-touez an aozidigezhioù bonreizhel ez eus unan dreistrenk, o vezañ ma'z eo ar re all bevennet ganti ha perzhiat enni, aozidigezh vonreizhel ar Stad kevreadel eo.

Gwironiezh ar riez kevreadel.

Stad kevreadel ha gwir etrevroadel

E-keñver ar gwir etrevroadel ne vez ket sellet ar riez kevreadel evel disheñvel diouzh ar riezoù all, un unvez a riegozh eo evel ar re all. Ar riegozh etrevroadel-se a vez embreget gant ar Stad kevreadel; ar Stadoù kevreet n'o deus bezoud etrevroadel diforc'h ebet. Dre-se

ez eus d'ar riez kevreadel :

1) Un unded a dudelezh etrevroadel. Ar Stad kevreadel hepken zo kembeliek evit skoulmañ darempredoù kenwerzh gant ar riezoù all. Hi hepken he deus ar gwir-brezeliñ, ar gwir-kannadañ, ar gwir-feuriañ. Mar bez graet torradurioù d'ar gwir etrevroadel gant ar Stadoù-ezel e vezont tamallet d'ar Stad kevreadel.

2) Un unded a vroadelezh. Amañ e ranker ober diforc'h etre an div berzhouelezh empleget gant ar framm kevreadel : pep annezad zo war un dro perzhour er riez ha perzhour er Stad kevreet m'emañ oc'h ann-ezañ. E berzhouelezh er riez a ro dezhañ e vroadelezh hervez ar gwir etrevroadel, a anver broadelezh-riez pe riezadelezh. E berzhouelezh en ur Stad kevreet a ro dezhañ ur vroadelezh-Stad, a anver c'hoazh annezouelezh. Ne vez ket anavezet ar vroadelezh-Stad-se er par etrevroadel, - n'eus ket divvroadelezh er ster gwirioniel enta. An daolenn amañ dindan a verk urzh ar perzhouelezhioù hag an termenoù arveret hervez ma seller diouzh savboent ar gwir etrevroadel pe diouzh savboent ar gwir keodedel.

*offpartenari
revez*

*Nag ar
stef gwerioù
kannadañ*

| | Gwir etrevroadel | Gwir keodedel |
|---------------------------------|--|-------------------------------|
| Perzhour er riez | riezad | keodedour |
| Perzhouelezh er riez | riezadelezh (broadelezh-riez) | keodedouelezh |
| Perzhour en ur Stad kevreet | annezour er Stad kevreet | keodedad er Stad kevreet |
| Perzhouelezh en ur Stad kevreet | annezouelezh er Stad kevreet (broadelezh-Stad) | keodedadelezh er Stad kevreet |

3) Un unded a diriegezh. An diriegezh, pe tiriad ar riez, a c'hoarvez eus hollad an tiriadoù kevreet hag ouzhpenn eus an tiriadoù a zo e kerz ar Stad kevreadel hec'h-unan, evel ar ranndir gevreadel ma sez hec'h aozadurioù, an trevadennoù pe ar broioù dalc'het da heul brezel

(evel ma voe da skouer Elsaz hag an darn eus Lotringen dalc'het gant an Impalaeriezh alaman da heul brezel 1870).

Stad kevreadel ha gwir bonreizhel

Ar Stad kevreadel zo dezhi un unded politikel hervez termenoù ar gwir bonreizhel.

1) Ar Stad kevreadel zo dezhi un aozidigezh vonreizhel danzeet gant ur galloud-bonreizhañ e piau d'ar riegezh leun.

2) An organoù kevreadel a zoug dezvoù talvoudek evit an holl riez-idi, rak perzhourion ar Stadoù kevreet zo ivez, an holl anezho perzhourion ar Stad kevreadel.

3) E piau ar Stad kevreadel ez eus ul lod eus ar galloud-amaezhiañ. Evit a sell ouzh danvezioù he c'hembeli, ez eo ar Stad kevreadel mestrez war an amaezhierzh; embreger a ra he gourbrientoù pe dre hent an amaezhiañ war-eeun (evel er Stadoù-Unanet), pe dre hantererezh benvegadur-amaezhiañ ar Stadoù kevreet reolet ganti (evel en Alamagn), pe dre genaozañ an daou zoare (evel en Aostria).

4) Ar Stad kevreadel zo dezhi ar gwir-barn. He lezioù-barn he deus; ul lez uhelañ pergen, karget da skarat an arguzioù gant ar Stadoù kevreet.

Stadoù kevreet ha gwir bonreizhel

Pep Stad-ezel zo un unvez politikel klok. Koulskoude ned eo ket riek er par etrevroadel, ned eo ket emveliek, met emren hepken.

Ent hanezel e teu alies ar Stadoù-ezel eus Stadoù a voe riek en amzer gent. En ur zont er c'hevread, he deus pep hini fiziet he rieg-ezh er Stad kevreadel ha miret hec'h emrenned vonreizhel. Aze emañ an diforc'h etre ur rannbarzh emren ent amaezhel en ur riez unstadel digreizennet hag ur Stad-ezel en ur riez kevreadel : freuzadur ar Stad kevreadel a lezfe kevan ar Stad-ezel, o reiñ dezhi an dro da adkemer he riegezh etrevroadel. Dezvad ar Stadoù kevreet e-keñver gwir bonreizhel a c'haller enta termenañ evel-henn :

1) Ar Stad kevreet zo dezhi un aozidigezh vonreizhel; emren eo he galloud-bonreizhañ e stern ar Vonreizh kevreadel.

2) Aozidigezh vonreizhel ar Stad kevreet zo kement hag ur reizhiad stadel klok. Enni emañ an holl organoù ret da embregerezh ar galloud-Stad. Emren eo ar Stad kevreet ken e-keñver amaezhierzh, ken e-keñver dezverezh, ken e-keñver barnerezh.

3) E penn ar Stad kevreet ez eus, n'eo ket kefridiaded gouleviet gant al levierzh-kreiz, met levierion wirion, o piaouañ ent leun ar galloudoù anavezet gant ar Vonreizh kevreadel d'ar Stadoù-ezel. O c'hembelioù a embregont ent dizalc'h diouzh pep emell a-berzh an organoù kevreadel nannbonreizhel.

4) Sonn eo e-keñver Bonreizh aozidigezh politikel ar Stad kevreet. Tra ma c'hell bepred galloud-dezvañ ar Stad unelour kreskiñ pe koazhañ an digreizennadur, e chom digembeli al levierzh kevreadel a-fet kemm-añ emrended ar Stadoù kevreet. Dre Vonreizh pep Stad hec'h-unan ez eo savelet doareoù an emrended-se, ha ne c'hellont bezañ daskemmet nemet dre zivizoù galloud-bonreizhañ ar Stad kevreet.

Kenweadur an aozidigezhioù bonreizhel kevreadel ha kevreet.

Amañ e teu a-wel an arvez all eus anadenn ar c'hevreañ, eleze ar perzhiadur.

Evel m'hon eus diskouezet, er riez kevreadel ne zisoc'h ket an urzh vonreizhel eus ar c'hevelstrollañ rik : lieselezh ar Stadoù kevreet zo kempouezet gant unelezh ar Stad kevreadel. Koulskoude, n'emañ ket ar Stadoù kevreet dindan ar Stad kevreadel en hevelep doare m'emañ ar rannbarzhioù dindan ar Stad unelour : ar gevreadelezh end-eeun a vir na vefe isurzhiet teskad an aozidigezhioù parzhiadel d'an aozidigezh holladel. E gerioù all, n'emañ ket ar stadelezh kevreadel dreistlakaet war ar stadelezhioù kevreet, met kenweet, kenintret emañ ganto.

Er par politikel e tle Stad kevreadel ha Stadoù kevreet derc'hel

*imbricaty
(keninhadur)*

*klusale
unite*

partelle

dominant

darempredoù a unvaniezh hag a genober. "Ret eo d'an aotrouniezh-kreiz, en ur vastañ da ezhommoù an hollad, doujañ da aotrouniezh ar parzhioù. Penn ar riez, diouzh e du, a zle fealded d'ar Stad hollat. An div Stad en em gloka an eil eben" (1).

Fetisaet eo ar c'henglokadur-se, e par an ensavadurioù, gant kenweadur hag etrewered an organoù kevreadel ha kevreet.

Ar Stadoù kevreet a gemer perzh en amparadur hag en arc'hwel aozidigezh vonreizhel ar Stad kevreadel

1) E-keñver ar galloud-bonreizhañ. Perzh o deus ar Stadoù-ezel e kement daskemmadenn eus ar Vonreizh kevreadel. "Hervez ar spered kevreadelour eo e ve darbennet azgweladur ar Vonreizh kevreadel gant muianiver dreistel an holl izili, ma n'eo ket zoken gant ur muianiver doareet (2)" (3).

2) E-keñver ar galloud-dezvañ. An divgambregezh zo ur vodelezh ret gant an Dael gevreadel. Dre an Eil Kambr eo o devez ar Stadoù-ezel derc'houezadur enni. "Pep Stad zo dezhi an hevelep niver a zerc'houezourion hag ar Stadoù-ezel all hep ma ve lakaet e kont braster an tiregezhioù pe niver o annezidi" (4).

A-geveskemm, aozidigezh vonreizhel ar Stad kevreadel a laka bevennoù da amparadur ha da arc'hwel aozidigezhioù politikel ar Stadoù kevreet

1) Dre berzh ar Vonreizh kevreadel ez eo rediet ar Stadoù kevreet da heuliañ pennaennoù ha da wiskañ furmoù bonreizhel 'zo. Anat eo ne' eo ket frammet heñvel al levrierezh na meizet heñvel palioù ar Stad er Republikoù soviedel hag e Stadoù-Unanet Amerika.

2) Aozidigezh vonreizhel ar Stad kevreadel a lam un darn eus kembelioù-dezvañ ar Stadoù kevreet. Hogos e pep lec'h e kaver un domandezvañ kemmesk.

3) Aozidigezh vonreizhel ar Stad kevreadel zo enni un organ karget da skarat ar breudoù etre Stad kevreadel ha Stadoù kevreet. Ar re-mañ

peurliesañ a gemer perzh en amparadur an organ barnerezhel-se.

Diseurtiezh ar riezoù kevreadel.

Hiziv emañ an darn vrasañ eus an Douar dindan riezoù kevreadel : ar Stadoù-Unanet, Kanada, Mec'hiko, Brazil, Argentina, Venezuela en Amerika; an Unaniezh Soviedel, Yougoslavia, Helvetia, Alamagn en Europa; India, Indonezia, Aostralia en Azia hag Okeania; Unaniezh Suafrika en Afrika.

Disheñvelderioù bras zo etre ar c'hevreadoù-se, ar pezh a zisk-ouez gwevnded hag azasausted ar reizhiad kevreadel. Ar riez kevreadel a c'hell bezañ ur Rouantelezh pe ur Weriniezh; Rouantelezhioù ha Republikoù a c'hell bezañ unanet zoken en hevelep kevread; ur Stad kevreet a c'hell d'he zro kevreañ Stadoù-ezel a eil derez.

Daou duadur enebek a gaver er riezoù kevreadel : an eil o lakaat pennbouez ar reizhiad gant ar Stad kevreadel, egile o lezel gant ar Stadoù-ezel an darnvuiañ eus an emelloù foran. Eleze, ez eus tu da renkañ ar riezoù kevreadel hervez ma ren enno an tuadur unelour pe an tuadur lieselour.

- (1) J.C.BLUNTSCHLI, Ar Politikerezh 1879.
- (2) Muianiver doareet, feur merket d'ar muianiver en ur vouezhiadeg pa rank dastum muioc'h eget 50 % eus ar mouezhioù; sk.: muianiver doareet en daoufarzh, en trifarzh.
- (3) Ch.DURAND, Kengreriad riezoù ha riez kevreadel 1930.
- (4) L.LE FUR, Riez kevreadel ha kengreriad riezoù 1896.

Liesskrivet gant ar gelaouenn.

Ar merour : H. LE MEE.

The first part of the report is devoted to a general introduction.

1. General Introduction

The first part of the report is devoted to a general introduction. It discusses the scope and objectives of the study, and provides a brief overview of the methodology used.

The second part of the report is devoted to a detailed description of the methodology used. It discusses the data sources, the sampling method, and the statistical techniques employed.

The third part of the report is devoted to a presentation of the results. It discusses the findings of the study, and compares them with the results of previous research.

2. Methodology

The methodology used in this study is based on a combination of qualitative and quantitative methods.

The data were collected through a series of interviews and focus groups.